

AN AMZER

NIV.4
8 PAJ.
2 LUR

NEDELEG LAOUEN!

D'AN HOLL LENNERIEN e hetomp eurvad e-pad ar gouelioù a zeu, ha da bep hini ac'hanoc'h e lavaromp, evel ma vez graet da geñver Nedeleg, gouel bras an holl dud er bed: "Peoc'h war an douar d'an dud a youl vat!"

BRUDEREZH EVIT "AN AMZER"

Ne c'hell ket ur gelaouenn kenderc'hel da vevañ ma n'eo ket anavezet. Setu perak e fell deomp ober bruderezh evit ma vo anavezetoc'h "AN AMZER". Evit dont a-benn d'hen ober, ez embann hor gelaouenn follennoù-

bruderezh ha follennoù-koumanantiñ. Evit resev anezho (da reiñ tro-dro deoc'h), skrivit decmp, hag e vo kaset deoc'h ar pezh a vo goulennet gan-eoc'h (niver a skouerennoù eus pep follenn).

DIOUZHTU SELLIT OUZH

PAJENNOÙ

PEVAR HA PEMP

KELEIER ETREVROADEL

UR PARLAMANT NEVEZ E PORTUGAL

Lisboa.- Mouezhiadegoù a zo bet e Portugal. Evit ar wech kentañ abaoe ar reveulzi (25 a viz Ebrél 1974), ez eus bet muioç'h a vouezhioù gant tud an tu dehou eget gant re an tu kleiz.

Kollet en deus ar strollad sokialour kalz mouezhioù, lod anezho aet d'ar Strollad Komunour, lod all dreist-holl d'ar Strollad Kevredad-Demokratel (tu kleiz-dehou).

Ned a ket mat armerzh Portugal. Hag evel bep gwech, daoust d'ar menozioù, ne chom ket ur gouarnamant pa vez fall armerzh ar vro.

Met ne vo ket echuet gant ar c'hudennoù evel-se. Da gentañ dre ma'z eus kalz labour dober evit ar gouarnamant-nevez: n'eo ket sur e vo aesoc'h d'ar gouarnamant-mañ gwellaat stad an armerzh eget d'an hini a oa betek-hen. Da c'houde ez eus ur gudenn: diouzh an tu dehou emañ darn vrasañ ar parlamant nevez, met chom a ra ar jeneral Eanes prezidant ar Republik (galloud a-walc'h gantañ), hag hemañ eo "cible" ar re o deus gounezet ar mouezhiadegoù. Tamallet e vez dezhañ bezañ

lezet ar Strollad Sokialour da rivinañ an armerzh tamm-ha-tamm. Er stad m'emañ erruet an traoù e Portugal, eo diaes lavarout o deus votet an dud evit an tu dehou en ur soñjal e vefe an tu gwellañ evit ren ar vro; pe dre eneberezh ouzh politikerezh ar gouarnamant, e vefe diouzh un tu pe diouzh un tu all.

A-benn miz Here bloaz a zeu e vo deuet ar c'houlz da welout al labour graet gant an dilennidi nevez, da geñver ar votadegoù bras.

M.S.

KEMENNOU...

PARIZ. Ti ar Yaouankiz: abadenn gant tud DIWAN d'an 12 a viz Kerzu. Arabat disoñjal ivez koan bras Ti ar Yaouankiz d'an 19 a viz Kerzu (22 rue Delambre, Paris XIV).

BREST. Staj brezhonek aozet gant "Bleun-Brug", etre ar 27 hag an 30 a viz Kerzu. Skrivit da: BLEUN-BRUG, 5 straed Francis James, 29200 BREST.

KELEIER ETREVROADEL

BERR-HA-BERR

§ Trubuilhoù e Maroko ar Su, etre an Talbenn Polisario ha lu Maroko: ouzhpenn ur c'hant tregont bennak a dud lazhet, hervez.

bet kemeret gant dalc'hidi an ayatollah Chariat-Madari e-pad un nebeut devezhioù, a zo bet adkemeret gant dalc'hidi an ayatollah Khomeiny.

§ Aet eo seurez Tereza da Oslo evit resev priñ Nobel ar Peoc'h, a zo bet roet dezhi hevlene. Nac'het he deus kemer perzh er goan hag a zo bet diskemennet. Arc'hant houmañ a zo bet roet dezhi gant ar priz.

§ Drouklazh, digwener tremenet e Pariz, un niz d'ar Sha. Harzet eo bet un Iranad gant ar polis saoz, ha bet adkaset da vro-C'hall. Graet en doa ur veaj mont-dont etre London ha Pariz en deiz-se. Dinamm e oa, ha lezet eo bet da vont kuit.

§ Goude radio Tabriz bezañ

KELAOUENNOÙ

PLANEDENN

Ur gelaouenn nevez a zo deut er-maez nebeut 'zo: PLANEDENN a vez graet ganti, ha dont a raio er-maez peder gwech ar bloavezh. Evel ma lavar Per Honore, rener ar gelaouenn, en e bennad-digeriñ, ne vo ket hepken "pezhoù lennegel" e-barzh, met kement tra a den da vab-den. Kavet e vez, da skouer, en niverenn-mañ, ur pennad-kaoz gant Naig Rozmor diwar-benn lec'h ar vaouez er gevredigezh a-wechall war ar maez.

Koulskoude ez eus barzhonegoù ha div zanevell plijus a-walc'h, hag erfin c'hoazh pennadoù-kaoz gant un toullad a dud, diwar-benn an desevel bugale e brezhoneg (tennet eo eus un enklask savet gant Mikael Madeg evit DIWAN.)

PLANEDENN (e skritur Fañch Morvannou): 1 plasenn ar Marc'hallac'h 29110 MONTRoulez (50 lur evit ar bloavezh).
Chañs vat dezhi!


KEBEG HA KANADA GANT JILI KARADEG

E 1976, evit ar wech kentañ, en doa ar strollad kebekat an darn vrasañ e parlamant Kebeg. Gant un herder diaes da grediñ, ar begbez a embanne evel-hen o c'hoant: an emrenerezh-a-nep an holl rannvroioù kanadian.

Bro-Gebeg a zo ur rannvro ken disheñvel diouzh an nav rannvro kanadian all. Da gentañ gant ar yezh, sur, met ivez gant ar gredenn (katolik), an diorroadur, an doare-bevañ tomoc'h, distagetoc'h diouzh an arc'hant, ar pezh a ra ur vroad. Neuze, penaos nac'hañ an emrenerezh d'ur rannvro ma toug pep tra da reiñ dezhi "gwir ar bobloù d'en em ren o-unan". Siwazh, kalz tud a chom amgredik hag aon ganto zoken diwar-benn da-zont an

emrenerezh-se! O arguzenn eo ez eus ezhom unaniezh; n'eus nemeti a zo gouest da stourm ouzh barradoù an armerzh. Hejañ a reont spontailh ar revo-

dro-lavar a chom c'hoazh termenet fall a-walc'h. "Dizalc'hder kevredadel" a zeu eus ur c'henlabour armerzhel strizh gant holl rannvroioù



Kastell Fontenac e Kebeg

AR BREZHONEG E MEDISINEREZH?

E 1774, e voe embannet e Montroulez ul levr skrivet evit an amlegezed, o reiñ dezho kuzulioù berr diwar-benn ar gwilioù. Netra souezhus betek-hen, panevefe e voe moulet e div yezh: galleg ha brezhoneg. War bep pajenn, e oa an destenn c'hallek war an tu kleiz hag an hini vrezhonek war an tu dehou. Eveljust, ne ouie ket ar galleg an holl dud d'ar mare-se. Koulskoude, e c'hell bezañ al levr-se ur skouer, e-kichen kalz levrioù teknik a vez embannet e galleg nemetken.

M.S.

neizadur (inflation), an dilabour (muic'h eget daou vilion a dud dilabour evit pemp milion warn ugent a ganadaiz). Kalz kebekiz a zo kizidik ouzh ar galv-se. Evit gwir, kalz anezho a ren ur vuhez aes, hep trabas hag heug o devez rak an dilabour, ha, neuze, rak an diouer a draoù hag an dienez. Ouzh ar menoze-se e tle stourm tud ar strollad kebekat, mar fell dezho chom e penn ar vro. Setu perak o deus didaeret doareoù-lavar o rolladur politikel, dre chom hep komz eus emrenerezh, met eus dizalc'hder-kevredadel, pe "souveraineté-association", un

all Kanada, met en ur chom emren.

Har deo gwir ez adroio ar politikerezh nevez-mañ fiziañs d'ar re amgredik, emañ e riskl da c'hinañ an emrenerezh ar-loupet. Daoust hag o deus an Ao Levesque hag e strollad kavet un diskaulm d'ar gudenn? Feadra ez eus da amgrediñ. Bro-Gebeg a die kuitaat ar c'hevredad kanadian. Ar gudenn a chom c'hoazh stignet.

Keleier, kemennoù, pennadoù, komanantoù hag evezhiadennoù a zo da gas d'ar memes chomlec'h (pajenn 7).

PROSEZ AR BEVFLAÑCHEREZH (VIVISECTION) E MARSILHA

An imbourc'herion ("chercheurs") a labour en INSERM (Ensavadur Broadel ar Skiant hag an Imbourc'h Mezegel) a stud e fed an alkoal war ar chas. Evit an dra-mañ e lakaont paour-maezh loened da evañ alkoal a gementadoù bras. Kement hag ul litrad hanter a win evit ur den deuet d'e vent. Ouzhpenn-se, ar c'helenner S... en deus troc'het kordenn-voezh ur c'hi evit ma ne vije

ket klevet keinvanoù hemañ gant an dud.

Savet he deus goulennoù ar c'hoarierez c'hall Briatte Bardot diwar-benn ar gudenn-mañ hag he deus lavaret e raio he seizh gwellañ evit ma vo harzet ouzh al lazadeg. Emichañs e vo paouezet bremañ, rak, zoken evit arakaat ar ouiziegezh eo mantrus lakaat gouzañv loened.

A.E.

LIZHER FORAN KASET DA BREZIDANT AR REPUBLIK:

Resevet hon eus al lizher digor a heul digant oaled Sant Ervan (Brest).

Aotrou Prezidant ar Republik,

A-benn un nebeut devezhioù e vo kinniget d'an Dael ul lezenn-a-zivout an diforc'hañ. Ar strolladoù ha kevrennoù brest-at a zo meneget dindan a sant pegen pouezus ar votadenn-se. Gouzout a reont eo diforc'hañ lazhañ un den, evel ma vez diskouezet gant al lezenn natur hag ivez gant ar vevoniezh a gemenn ez eo dija un den penn-da-benn ar vi spriet. Setu perak e tiskleriont ez kefridiel ez int a-du groñs gant an doujañs d'ar vuhez ha penn-da-benn a-enep an diforc'hañ; goulenñ a reont e vefe lamet al lezenn meneget a-us ha lakaat en he lec'h ul lezenn da sikour ar mammoù en diessamantoù ha da wareziñ ar vugale da vezañ ganet.

An diforc'hañ a zo anezhañ lazhadeg tud dinnoz ha dizifenh. Kannaded ha senedourien 'zo a sav a-enep ar boan a varv evit tud a c'hell en em zifenn.

Bloavezh ar vugale eo 1979. En degouezh-se e vefe ret kendeuziñ ar mennadoù-se da ober ganto ul "lezenn a vuhez" a vefe lakaet e-lec'h lezenn marvus 1975.

Ezhomm bras 'zo distreiñ d'ar garantez ha da wir talvoudoù mab-den.

Asantit degemet, aotrou Prezidant, hor gourc'hemennoù... (Lizher kaset da holl gannaded ha senedourien Vreizh.)

«SUPERTRAMP» E PARIZ

"SUPERTRAMP", ar bagad sonerien saoz a sono diriaoù, digwener, disadorn ha disul adalek 8 eur noz e "Favillon Paris".

En em gannañ a ra tud 'zo o chom er-maez eus Pariz evit kavout plasoù, hag e Pariz ez eus bet gwerzhet gant RTL (Radio Luxembourg) 26.000 bilhed e korf 36 eurvezh.

Degouezhet ag ar Stadoù-

Unanet hag a gKanada, emañ "Supertramp" en Europa abaoe daou viz. Pemp soner ez inti Rick DAVIS, Roger HODSSON, John ANTHONY-MELLINELL, Dougie THOMSON ha Bob C. BENBERG. Nac'hañ a reont an etregveladennoù, ha ne dorront ket o binvioù.

En ur ger, "anti-vedette" ez

V.G.

LEVRIOÙ HA PLADENNOÙ
COOP BREIZH
17 STRAED PENHOET ROAZHON
HAG IVEZ AR BAOL & PARIZ

BREIZH

DEIZIATAER SKOL AN EMSAV

Deut eo er-maez deiziataer 1980 "Skol an Emsav". Graet eo evel er bloavezhioù tremenet. E-barzh ar golo plastik ez eus div lodenn. El lodenn gentañ e kaver an deiziataer (ur sizhun-vezh dre bep pajenn) gant un nebeut krennlavarioù, ur gartenn Vreizh, taolenn ar gouelioù betek 1984, chomlec'hioù oaledoù 'zo, taolenn ar frouezh hag al legumaj, penaos sevel ur chekenn vrezhonek, chomlec'hioù kelaouennoù brezhonek 'zo, taolenn ar c'hemmadurioù, hag ivez ur pennad o tiskleriañ pe re eo palioù S.A.E., hag ur bajenn evit ar skolioù DIWAN. En eil lod e kaver roll niverennoù-post parrezioù hor bro, ur c'hounlevr personel ha penaos pellgomz etre ar pemp departamant.

Savet mat e vez deiziataer-
ioù S.A.E. bep bloaz, aes da
lakaat e godell-ziabarzh ar
chupenn. Emañ hini 1980 e
gwerzh el levrديوù breizhek,
met posubl eo goulenn anezhañ
digant Skol an Emsav: 4 straed
Sant Vazhe, e Kemper (29000), pe
5 straed Hoche, e Roazhon
(35000). Koust a ra 12 lur.

DIFENNOURIEN HENT-HOUARN BREIZH KONDAONET!...

Kemper.- E-kerz ar sizhun-
mañ, e tremene dirak lezvarn
gKemper seizh den o doa harzet
un tren e Banaleg, d'ar 7 a
viz Here 1979. Kondaonet int
bet, pep hini, da baeañ 1.000
lur.

Diaes eo kavout ur c'hlozad-
ur, rak evel bep gwech e seurt
abadennoù, ez eus tud o tifenn
daou venoz disheñvel-krenn: ar
re gentañ a zifenn al lezenn
hep gwelout en tu all dezhi ar
gwirvoud, ar re all o soñjal
en o bro er-maez eus al lezenn.

Met un dra a zo sur: kudennoù
a bouez bras a zo e Breizh
evit ar pezh a sell ouzh an
hent-houarn, ha n'eo ket gant
kondaonidigezhioù e vo dis-
koulmet.

BERR-HA-BERR

Priz-veur kêr-Roazhon al
lennegezh a zo bet roet da
Henri Queffelec evit e holl
oberennoù.

ABADENNOÙ BREZHONEK

SKINGOMZ

PEMDEZIEK (ket d'ar Sul)

KELEIER

07e20 Brest (OM & FM)

12e20 Brest (OM & FM)

12e25 Gwened (FM) e gwenedeg

SIZHUNIEK

DIMERC 'HER

"AR SEIZ AVEL"

10e15/11e00 Brest (FM) &
Gwened (FM)

DIGWENER

"PEBR HA HOLEN"

10e15/11e00 Brest (FM) &
Gwened (FM)

DISUL

"LIV AN AMZER"

11e00/12e00 Brest (FM) &
Gwened (FM)

13e00/14e00 Roazhon (OM) &
Brest (OM)

N'eus nemet an abadenn-mañ
hag a vez posubl klevout e
Breizh a-bezh.

SKINWEL

SIZHUNIEK

DIMERC 'HER

"NOZVAT"

19e50 (ket el Liger Atlantel)

DISADORN

"BREIZH O VEVAN"

13e30/13e50 Breizh a-bezh

"NOZVAT"

19e45 (ket el Liger Atlantel)

DISKOULM

AR GERIOU-KROAZ

A-BLAEN

- 1) NEVENOE. AL.
- 2) EMAÑ. STERN.
- 3) TAK. ATALA.
- 4) ROAD. IDOLE.
- 5) AMNEUZ.
- 6) PSIKEK. PE.
- 7) OZ.ZOKEN.
- 8) TRUIL. AERA.
- 9) RA. AMELIA.
- 10) ENED. LANGU.

A-SERZH

- 1) NETRA. ETRE.
- 2) EMAOMP. RAN.
- 3) VAKANSOU.
- 4) EN. DEIZIAD.
- 5) UK. LM.
- 6) OSTIZEZ. EL.
- 7) ETAD. KOALA.
- 8) ELOI. KEIN.
- 9) ARAL. PERAG.
- 10) LN. ELENA.

"AN AMZER"

2 sd ar Richardiere
35100 ROAZHON

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU (12 niverenn):
Reizh: 18 lur
Studieren, skolidi: 12 lur
Skoazell: 25 pe 30 lur

KRP (Decambourg): 25.97V Roazhon

Moulet ez eus bet 300 sk.
a'n niverenn-mañ

STAJOU TI-KENDALC'H

SONEREZH

Dindan renerezh Jakez Princet e vo aozet ur staj sonerezh e ti-Kendalc'h: biniou bras, bombard, taboulinoù. Adalek ar 26 a viz Kerzu 1979 da 10 eur e vo, betek an 30 a viz Kerzu da 17 eur. Koust a raio 450 lur. Roll-labour: sonouriezh war ur benveg, pep hini hervez e live.

DANSOU GIZ GWECHALL

Aozet e vo ivez e Ti-kendalc'h ur staj dañsoù giz gwechall renet gant an itron Lancelot, adalek an 20 a viz Kerzu 1979 da noz, betek ar 24 a viz Kerzu d'endervezh. Graet

eo ar staj-mañ evit tud a oar dija dañsal: diouzh un tu evit tud o deus bet an "eil derez", pe a anavez mat-tre dañsoù Breizh, hag ivez evit monitourien kelc'hioù keltiek; diouzh an tu all, evit kenderc'hel gant al labour kroget e-pad staj an "trede derez" e miz C'hwevrer 1979. Koust a raio 450 lur en holl (kentelioù ha lojeiz). Stank e vo an traoù war ar roll-labour: filmoù, beilhadegoù gant tud ar c'horn bro h.a., dudies avat.

Evit an daou staj-mañ, skrivit da: Ti-Kendalc'h, kreizenn Sevenadurel Breizhek, Sant Visant war Oud, 56350 ALAER.

KEMENNADENN DIGANT AR BLEUN-BRUG

P'emañ kuzul Sevenadurel Breizh war-nes en em vodañ d'an 13 a viz Kerzu a zæu, e Kemper, o deus tud ar Bleun-Brug merzet penaos ne vez ket graet a-walc'h diouzh kement a zo skrivet er garta sevenadurel.

Rak, daoust d'ar pezh a respont maodiern an Deskadurezh da veur a zilennad, daoust da gomzoù sioulaat prefed ar rannvro "Bretagne" en e lizher diwezhañ, e chom un islonk

etre ar pezh a zo bet divizet er garta, hag an nebeut traoù-igoù kroget da seveniñ anezho betek-hen.

.....

Evit gwir, eo a-ratozh e vez graet gant darn hepken eus dizantezioù ar garta, o tiskouez anat youl fall maodiern an Deskadurezh a ra e seizh gwellañ evit mirout na vefe diorroet e gwirionez kelennadurezh yezh ha sevenadur Breizh.

MA FELL DEOC'H LENN

BEP EIL SIZHUN

KELEIER E BREZHONEG,

LENNIT

AN AMZER

2 SD AR RICHARDIERE
35100 ROAZHON

KOUMANANTOÙ (12 NIVERENN):
REIZH:18 LUR; SKOL.STUD. :12 LUR
SKOAZELL:25/30LUR